

## KIS-598 – Pennaenn an angouzout

(GE – 03 10 98)

Dre ma ranke ar brezhoneg bezañ diorreet a-raok talvout d'ar vuhez eo deuet splann dimp ar c'hemm etre an div ziskiblezh ez eo ar Yezhoniezh evel studi ar yezh graet hag ar Yezhouriezh<sup>1</sup> evel arz an ober yezh. War un dro e stademp n'eo ket nemedennek ar blegenn m'emañ hon yezh : mard eo bevañ e brezhoneg un embregadenn a zo ar vrasañ lodenn anezhi krouiñ ar brezhoneg, ned eo ket disheñvel ar bevañ er yezhoù all. Un devoud retvezek eo, o tennañ da anien al lavar : bevañ en ur yezh zo genel yezh. Ar Yezhouriezh zo enta estreget ur c'hempennerezh trobarzh eilrenk eus ar yezh. Ar yezhoniour he salud evel ar c'hoar vihan d'e ziskiblezh ne wel ket emañ ar preder digoret gant ar Yezhouriezh o lakaat en argraf ar Yezhoniezh betek en he diazezoù.

---

<sup>1</sup> E-pad pell e voe graet kensterioù eus *Yezhoniezh* ha *Yezhouriezh*. Ar pezh a anvomp *Yezhouriezh* hiziv zo ken kozh hag ar yezhoù. Evel a ouzer ez eo en 18<sup>t</sup> kantved e voe boulc'het a-zevri labour yezhouriañ ar brezhoneg arnevez. Met n'eo nemet er bloavezhioù 1950 e klaskad un anv evitañ. E diouer gervaoù evit embannadurioù all ar mare, o fiziout war *Gerva Preder* hepken, e verzher ez eo Youenn OLIER an hini kentañ a skrivas a-zivout “*sturyezhouriezh*, ar skiant a ziskouez penaos ren ha lezenniñ buhez ar yezhoù” (*Istor an Emsav sevenadurel abaoe ar Brezel bed kentañ*, Preder 15-16, 1960, p. 51). Roparz HEMON en defe luniet ar ger e tro 1955, nemet en en dilezas da c'houde e gounid *sturyezhoniezh* despizet en e *C'heriadur broadel* (ABKE., 1971, p. 382) evel “ar rann eus ar yezhoniezh a studi an doare da sturiañ emdroadur ur yezh”. E NDBF. 1970, e roe d'an termen ar c'hevatal Gl. *linguistique appliquée*. En *Emsav* 3, 1967, p. 66, e reer eus ar *sturyezhouriezh* “skiant ha pleustrezh ar sturyezhañ”, hemañ o vezañ “sturiañ emdroadur ur yezh diouzh ezhommoù nevez”. Endra veze tastornadurioù en doare da envel an diskiblezh ez ae war spisaat ar mennoz anezhi : tamm ha tamm e paoueze a vezañ ur studi war an ober evit bezañ un ober harpet war ar studi. Tro 'm eus bet da vrastresañ an emdroadur e Goudenotenn LAVAR 08 : “Davit un damkaniezh eus ar sturyezhañ” (pp. 515-520) ha war un dro da ginnig an anvad *Yezhouriezh* evit an “ober yezh”: “Ar *sturyezhour* ne *stur* ket muioc'h eskoridigezh ar furmoù yezh nevez eget ma *stur* ar barzh diwanidigezh e varzhonegoù. Setu perak e ve kenkoulz ober gant *yezhouriezh* hep-mui, termen en em gav kevenebet ouzh *yezhoniezh* en un doare dibar, hep pellaat evelkent diouzh erbedadennoù Vallée war arver al lostgerioù *-ouriezh* hag *-oniezh*” (p. 518).

Bresk eo saviad ar Yezhoniezh evel hini an diskiblezhioù oc'h amkanañ en aner bezañ degemeret er Ouezoniezh. Kaer zo bet dezhi distagañ ar yezh diouzh an den evel diouzh ar bed hag he diren d'un trevnad arouezioù, ne gempleg ket d'an diviz evit mont tre, pa na c'hell ket an arouez bezañ divoud gouezoniel ; un ergorenn alvezel eo hi hep mar, o talvoud avat estreget ar pezh ez eo — talvoud ha n'eus anezhañ nemet evit un dangorenn : arloet outi pennaenn an ergorelezh e rank lezel ar parzh dangorel anezhi e toull dor ar ouezoniezh ha steuziañ evel arouez. Dre veur a hent he deus ar Yezhoniezh klasket parraat ouzh ar stlezhvad orin, boutin etrezi hag an diskiblezhioù bodet e klub “skiantoù an den”. Korvoet he deus da gentañ arguzenn ar c'henglev etre an dangorennoù : en hevelep doare ma wel an holl al Loar ha ma te zastumont ez eus anezhi ent ergorel, e tebarzher ur meni ergorelezh d'an arouez war zigarez ma anavez an holl an un tra enni. An holl ? Deuet unan dic'houzvez eus ar voneg ha dioueliet e vo diouer hollegezh, gouizielezh enta, ar c'henglev : ergorelezh zo estreget kendangorelezh. Arnodet ez eus bet un tun all da hepkoriñ ar skoilh dre gorvoiñ an derez kensturded a vez etre skor alvezel ha talvoudegezh an arouezioù : oc'h arseliñ an elfennoù a ra ur yezh e tizoloer ur rouedad kevenepeterioù alvezel o c'hoari ur roll e talvoudegezh an arouezioù hag e reer anv a *struktur*. Lakaat a reer ar pouez, n'eo mui war neuz krai, tidek, an arouezioù, met war ar reizhiad kevenepeterioù *perzhek* etrezo — *perzhek*, eleze o c'hoari ur roll en o zalvoudegezh. Da skouer, *perzhek* eo ar c'hemm alvezel etre Br. *redan* ha *redomp* pa verk ur c'hemm talvoudegezh etre an daou hanc'her ; anperzhek eo ar c'hemm etre Br. [

R

e

dã] ha

[

R

e

dã] pa'z int daou zoare da zistagañ an un hanc'her. Amkan ar strukturelouriezh eo diren ar yezh d'he *struktur*, eleze d'ar reizhiad kevenepeterioù dizoloet etre he arouezioù, ober eus ar yezh, dre he *struktur* ar wech-mañ, un ergorenn alvezel a-benn ar fin. Hogen, ouzhpenn “na c'hell ket ar *struktur* ober meiz war an holl anadennoù a ampar ur yezh<sup>1</sup>”, emañ enni an hevelep stlezhvad orin a sparle dor ar ouezoniezh ouzh an arouez : n'eus oc'h amparañ ar *struktur* nemet kevenepeterioù *perzhek*, eleze soliet e talvoudegezh an arouezioù. E dibenn dezrann

<sup>1</sup> “[...] la structure ne peut rendre compte de tous les phénomènes qui composent une langue” (James DE FINNEY, in *Dictionnaire de la linguistique sous la direction de Georges MOUNIN*, PUF, 1974, p. 307).

emañ ar *struktur*, evel an arouez, e dalc'h an dangorelezh hag ar *yezhoniezh strukturel* ned eo ket, muioc'h eget ar yezhoniezh klasel, ur ouezoniezh. Kemplezh eo enta staelad gouziadoniell an arouez, evel hini ar *struktur* : ambredennoù hiron int, ouzh o amparañ ur skor alvezel hag un arc'hwel buhezel. Betek gouzout e rin anezho *ledergorennoù*, eleze ergorennoù ken enlenat dezho, ken ret d'o bezoud, o c'hedrann alvezel hag o c'hedrann vuhezel.

Distroomp war ur c'heal a'm eus arveret a-zioc'h : ar c'henglev a ro d'an arouez he roll er gedvuhez. Pa zigoromp ar gazetenn pep beure, pa c'houlennomp ur choanenn digant hon baraer, ez eo an arouezioù ken rediv warnomp hag ur savelegezh. Ar c'henglev a ra anien ar gedvuhez a ve un astenn d'ar c'henglev a ra anien ar yezh pe gentoc'h ar c'henglev yezhel eo a ve un degouezh dibarek eus ar c'henglev kevredigezhel. En ur ger, en hevelep doare m'emañ ar parzh korfel ac'hanomp dindan ren ar savelegezh alvezel, e ve hon perzhiadur er gedvuhez endalc'het gant destrizh ur *struktur* gevredigezhel ken rediv hag ur savelegezh, ar skouer splannañ o vezañ ar yezh na c'hellomp arverañ hep kemplegañ d'he *struktur*. Kaer zo d'an arouezioù bezañ *ledergorennoù*, an nesañ int d'an ergorelezh ha solius int pa fizier warno evel pa vijent ergorennoù alvezel — daoust hag ar soliusañ holl n'eo ket “yezh” an urzhiataer, ha hi koazhet d'ur *struktur* alvezel pur ? An arouezioù a ve enta hent ar werc'helezh werc'hekañ ha n'hor be nemet ren hon gwerc'hadur diouzh ar gouziadur hon eus anezho. Evel se e ve d'an nebeutañ mar be hon bed ur bed a arouezioù. Hogen, evit an arouezioù da gaout ul lec'h, hag unan pouezus, en hon buhez n'emañ ket hon buhez diazezet warno. Ar bara ez an da gerc'hat ned eo *ergorenn* nemet e termen un dassell a amkan gouziell, rak e'm buhez buhezet eeun ez eus anezhañ un *ergerc'henn*, eleze “pezh a glaskan ennañ ha drezañ kaout gwalc'hadur” (GBLF. ¶ 826). En eneb d'ar pezh a soñj ar re a gred soliañ o bedouriezh war bennaenn an ergorelezh, e vevomp da gentañ en ur bed a *ergerc'hennnoù*, an ergorennoù o vezañ un degouezh bevrennat e disoc'h un argerzh divuhezelaat.

A se diac'hinegezh saviad an den kornogat — hag, o vont betek penn va mennoz, an *homo americanus* — a zo diazezañ e vuhez war an arouez, eleze war un elfenn a zo he eorizh an divuhezelaat. Ne ran ket anv amañ eus an arouez gougevan ouzh gwezenn ar vuhez, met eus an arouez diframmet diouzh he gwrizioù buhezel, lamet diouti pep brelladur ergerc'hel. Etre ar c'hanteul hag an arganteul eus an arouez ma sav enni sabr ar vuhez ez eus un ere neuennus, war fiñv bepred. En arouez ma solier warni ar vuhez e ranker startaat an ere, kas pep fiñvusted da get, ken e spir hep mui ar c'hanteulioù hag ar bonegoù diogel a amparont. Evel ma vez unsteret an arouezioù, e vez unsteret ivez ar realoù ha direet eo ar vuhez d'ur voneg. Gwa an neb a drozo houmañ. Koul

Clinton o kaout mestrezed n'eo ket terriñ an divezouriezh, met degas fiñvusted en-dro e-barzh boneg ar *strukturioù* a ra atel ar gedvuhez amerikan, plantañ ur viruz en arvar da skoilhañ ar reizhiad m'emañ drezi ar gedvuhez amerikan o pakañ ar Blanedenn a-bezh.

Kent mont pelloc'h e fell din distreiñ war geal al *ledergorenn* a'm eus arveret da zoareañ an arouez. Ha kantrat eo intent an ergorenn alvezel evel an dealf tralenat a saveler an arouez en e geñver evel ur furm displeberet anezhañ — alese arver ar rakger disteraus *led-* ?

Lakaomp da gentañ an aters war staelad gouiziadoniel an ergorenn alvezel. Tro 'm eus bet da voulc'hañ ur respont oc'h ober eus hiniennded an ergorenn alvezel un hiniennded *kedet* (sl. KIS-501, La-10, p. 397 ; KIS-540, La-11, p. 224). Kediñ zo a-berzh an den astenn d'ar bed ar feiz en deus ennañ e unan : ar c'hoaliñ an unan hag ar c'hoaliñ bed zo an un *Urglaube*, an un bongoaliñ. Daou arvez zo d'ar c'hoaliñ bed, da gentañ ar c'hediñ bezout a c'haller deluniañ : me zo  $\emptyset$  ar bed zo, d'an eil ar c'hediñ hiniennded a c'haller deluniañ : me zo me  $\emptyset$  ar menez zo ar menez. Hogen, endra chom gant ar c'hediñ bezout ur roll trehontel na oufed heptañ ober kel eus ar bed, ez eo ar c'hediñ hiniennded lec'h un argerzh nac'hek ma rank an anaout mont drezañ war glask da warded ar bed. Hon anaout eeunek eus ar bed intret gant an denervannañ a ezvevennomp evit kouezhañ en un anaout e ser bevervannañ, h.a. : lerc'h ouzh lerc'h e kedomp hiniennded ar menez, hiniennded ur maen eus ar menez, hini un atomenn eus ar maen, ur rannig eus an atomenn, o tifourkañ a-benn ar fin (evit ar mare) en ur skeul tebegezh... Naouiñ a ra an ergorenn alvezel evel an dilerc'h eus ezvevennadeg gwiskadoù an ervannañ enlenat d'ar c'hediñ hiniennded — dilerc'h kedet bepred, forzh pegen distrilhet e ve dre an imbourc'h gouiziel. Gant gerioù all : naouiñ a ra an ergorelezh evel pennaenn ur moned nac'hek angourfenn (an angourfenn ez eo dres kerzh ar ouezoniezh) — e se ez eus anezhi un ergraf bevrennat.

E-keñver luniad dialuskel an ergorenn alvezel he deus an arouez ul luniad ken dibar all. Savelañ an ergorenn alvezel, emamp o paouez e welout, a c'hoarvez eus ur steudad gwezhioù kediñ, pep gwezh kediñ o tont da heul diskuliañ hag ezvevennañ an ervannad graet e ser ar gwezh kediñ kent. En eneb, savelañ an arouez, e-lec'h ezvevennañ nep ervannad, zo gwiskañ un ervannad nevez war an ergorenn. An arouez zo disoc'h ur c'hediñ durc'haet nann da anaout gwirde ar beziadoù dre zistremen an ervannadoù, met da zispakañ bezusterioù dre zerc'haviñ an ervannañ. Ar skultour a ya d'ar maen, nann war glask da warded un ergorenn alvezel, met war-benn ober anezhañ lec'h un ervannad digunvez, digent e-keñver steudad an ervannadoù en defe ar gouezoniour da ezvevennañ.

Hogen peban e teu an ervannad ez eo ar skultadenn, an arouez ? Aters skoemp, skarus avat. Daou vod hon eus bet tro da ziforc'hiñ d'ar c'hediñ : dre ar *c'hengounaouiñ* (sl. KIS-501, ibid.) e hiniennaomp ar menez en e sav war an dremmwel evel ma emaeomp ni en hon sav dirazañ ; dre ar *c'hengouzerc'hiñ* ez oberiomp an ostilh oc'h ervannañ warnañ goulun an arver a c'hoantaomp, ivez ez ervann ar skultour war ar maen an oberenn a ergerc'h, ez ervann ar yezhour war danvez ar yezh ar furmoù a ergerc'h. Ken e tegouezhomp gant an aters : hag un andon disheñvel zo d'an neuzioù a gedomp d'ar bed dre gengounaouiñ ha d'an neuzioù a gedomp dre gengouzerc'hiñ ? Gant termenoù eeunoc'h : daoust ha neuz ar maen kent taolioù ar skultour ha neuz ar skultadenn graet n'emaint ket o strinkañ eus an un andon ? E berr, daoust hag ar gwiskadoù ervannadoù distaolet unan hag unan gant ar gouezoniour n'int ket a un arzoned hag ar gwiskad ouzhpennet gant an arzour, ar yezhour, nep krouer arouezioù ? War an un danvez e ren ar gouezoniour e labour *disav*, an arzour e labour *sevel*. A se, mar be an arouez ul *ledergorenn* diouzh savboent an disav, e ve an ergorenn alvezel ul *ledergerc'henn* diouzh savboent ar sevel — an un tra a lavarfed oc'h intent an *ober* evel un *dialvezelaat* evel ma intenter an *anaout* evel un *divuhezelaat*. Rak, e dibenn dezrann, kevenebiñ ergorenn hag arouez, alvez ha buhez, natur hag arz n'eo ket kevenebiñ solwezioù met arvezioù. Arvezioù eus petra ? a c'houlennor. Goulenn hemañ a zo a seurt gant an hini a glever dirak an oberenn arz : “Met da belec'h eo aet da gerc'hat kement-se ? — an arzour ne ve ket evit respont — ha gant an aters all : “Peban e teu ar bed ?”. Kevrin eo andon an oberenn arz evel ma'z eo kevrin andon an ergorenn alvezel. An un kevrin eo, rak an un bed eo ar bed ergerc'henn an arzour hag ar bed ergorenn ar gouezoniour. Bomm HEIDEGGER : “*Welt ist nie, sondern weltet*”<sup>1</sup> a intentan evel henn : evel ma'z eo an arz ober arz (*arziñ*), ez eo ar bed ober bed (*bediñ*), unan ma'z eo *arziñ* ha *bediñ*. An arz evel ar ouezoniezh zo anaout-ober, *nit* ; an diforc'h etrezo eo e vez stiet an arzour war an ober bed, ar gouezoniour war an anaout bed — emaint o daou engwezhiet er bediñ, an arzour evel oberour, ar gouezoniour evel anavezour, loet an eil hag egile etre kevrin ar peban ha kevrin an daved : hini anezho ne oar a belec'h e teu na da belec'h ez a ar bed ez eo e hini, alvezel evit an eil, arouezel evit egile.

Strivet 'm eus da lakaat war wel pezh a zo hevelep ha pezh a zo kevenep e saviadoù ketep an arzour hag ar gouezoniour — saviadoù a zo a-benn ar fin an daou vlein emañ stignet etrezo saviad den ar pemdez, pep hini ac'hanomp, na pa ve arzour

<sup>1</sup> Frazenn a'm boa troet gwechall : “Ar bed n'eo nepred, ar bediñ eo a zo”, sl. “Bezout ha hanvout”, La-01, 1966, p. 99.

pe ouezoniour. Pep hini a vev en ur bed a ergerc'henoù a zo war un dro ergorenoù. Pa'z an da gerc'hat bara, pa'z an d'an ergerc'henn bara, ez eus din buhezadoù ergerc'hel eus frond ar choanenn fresk, eus touch ar c'hreun rust ha bresk, eus an eürusted a ziflukje diouzhin e rezh ur barzhoneg kenkoulz all ma ne vijen ket desachet trumm war-du ar choanenn ergorenn gant mouezh ar varaerez o venegiñ he friz. Heñvel dra, mard an d'al lavar gant berzh, pe evit deluzañ ur buhezad, pe evit dec'heriañ ur c'heal, ez eus un ergerc'henn eus ar bomm a zisoc'han gantañ ha war un dro e teu ar bomm, hag eñ frouezh ul lankad rezid, d'un neudenn etre neudenoù all gwiad ar yezh : pezh a voe ergerc'henn ar barzh pe ar yezhour a ya da “ergorenn” ar yezhoniour.

Distro omp da brepoz derou an notenn-mañ. Donoc'h e c'hellomp kas hon dezrann keñverel eus ar Yezhouriezh hag ar Yezhoniezh.

Ar Yezhouriezh, evel pep arz, zo seveniñ oberenn : he oberenn eo ar yezh. Ar yezh evel oberenn zo stignet etre kevrin ar peban ha kevrin an daved, disoc'h eo d“un anaout-ober o tont e lusk eus an diagiz etrezek un diahont” (KIS-595, La-12, p. 229) ; gant gerioù all ez eo ar yezh ur beziad nidiadel. Intret eo gant ar c'hevren, darnzioueliet dalc'hmat hag evel ma lavar MERLEAU-PONTY : “bez' he deus dirazi he hoali hogos en e bezh<sup>1</sup>”. He ampar pennañ eo an donder amzer, an ampar treadegel<sup>2</sup>. Evel ar stered e froudoù an neñv, he furmoù, an arouezioù, a chom disked, anniñv ha trumm e ser un taol nit, azniñvet, a splann. Pouezañ a ran war vevennidigezh an anaout en daouad dibar anaout-ober : ne vern pegen bras e ve anaoudegezhioù an arzour, ar yezhour, ne oar ket a belec'h e teu na da belec'h ez a an oberenn, ha se nann dre zeberzh, dre un harzegezh naouus da vab den, met dre ur retvez a zo hini an ober nidiat. Ken e rin anv e-keñver hemañ eus ur *bennaenn a'n angouzout*, a rafen c'hoazh *pennaenn Abraham*<sup>1</sup> anezhi.

Ar Yezhoniezh n'eo ket ur ouezoniezh — a-zioc'h e'm eus lakaet etre daouskilfoù ar meneg eus he “ergorenoù”, a zo ledergorenoù — nemet emañ ganti an un durc'hadur hag ar ouezoniezh : war he divoud, ar yezh, e ren un disav heñvel ouzh an disav a ren ar Gimiezh war ar c'horfoù pe ar Fizik war an atom. An diforc'h

---

<sup>1</sup> “Si les créations ne sont pas un acquis, ce n'est pas seulement que, comme toutes choses, elles passent, c'est aussi qu'elles ont presque toute leur vie devant elles”, frazenn diwezhañ *L'Œil et l'Esprit*, Gallimard, 1964, pp. 92-93.

<sup>2</sup> Diegi 'm bez oc'h ober gant *treadegel* en askont eus ar c'hemeradur soliadal a roe dezhañ SAUSSURE.

<sup>1</sup> “Dre ar feiz e sentas Abraham ouzh galv Doue, evit mont kuit d'ar vro a zlee kaout da hêrezh, ma'z eas war-raok hep gouzout da belec'h edo o vont”, *Lizher Sant Paol d'an Hebreed*, 11, 8.

etrezi hag int eo emañ bevennet lec'hed he dezrann : endra dremen an Alvezoniezh eus ar c'horf d'ar molekul, eus ar molekul d'an atom, eus an atom d'ar rannigoù, h.a. hep nepred mont er-maez eus he divoud, ez a ar Yezhoniezh lakaomp eus ar prezeg d'ar c'hanteul, eus ar c'hanteul d'ar vouezhiad hag en derez dindan e kuita he divoud evit difourkañ er Stenoniezh. Muioc'h, ar c'hanteul n'eo divoud ar Yezhoniezh nemet dre berzh e gendaveeg an arganteul, beziad dangorel ; diouzh he zu, an arouez n'eo divoud yezhoniel nemet dre berzh he c'hendaveeg an ergeñverenn, an ergeñverin o vezañ ivez un arc'hwel dangorel. An ergeñverenn he unan, ar menez da skouer, zo diouzh un tu un ergorenn alvezel, nemet e piaou he hinienned dre gediñ, e se ez eus anezhi, evel eus an arouez he denot, ul ledergorenn. Ar soniadoù, a vuzulier, a geñverier kenetrezo, a jedoniekader evel nep braster alvezel, zo ent strizh beziadoù stenoniel ha n'int divoud d'ar Yezhoniezh nemet dre hanterezh ar mouezhiadoù ez int ar c'helanoù anezho. Heñvel dra evit ar *strukturioù*, arvez jedoniekadus, diadaol kevadegel tennet eus luniadur hag arc'hwelerezh ur yezh, a sko hebiou kaer da anien ar yezh a zo treadegel en he ampar pennañ. Pell diouzhin me ar mennoz disteraat ar Yezhoniezh : ar yezhouriezh on sterniet outi a-c'houde pemont vloaz a vije chomet gaonac'h hep skoazell ar yezhoniourion, hep skoazell koulz lavaret pemdeziek unan anezho dreist-holl aketus da bourchas din an anaoudegezhioù, anspirus met diziouerus, d'ar yezhour — e zellid, bras ha dibaot, eo bezañ komprenet n'eus eus ar c'houbladoù ergorel-dangorel a ra divoud ar Yezhoniezh nemet furmoù anniñv, kouskedet war-benn oberata, e berr beziadoù soliadet, endra ez eus eus ar yezh niñvek, defraou, ur beziad nidiadel.

Amañ e tere ober anv eus un diskiblezh a venn bezañ un hollekadur eus ar Yezhoniezh strukturel, un astenn anezhi da skiantoù all an den, ar Semiotik<sup>1</sup>. “Ar semiologiezh pe semiotik (eus ar gresianeg *σημειωτική*, « arouez ») a denn hiziv da emadeiladiñ evel skiant an arouesadoù. E kement ha henn, ha dre se, ez eo ar semiologiezh hentennouriezh ar skiantoù a bled gant ar reizhiadoù arouesaat, eleze « skiantoù an den », peogwir e sell ar pleustroù kevredadel-istorel a zo divoud an kez skiantoù (ar gwengel, ar gravez, al lennegezh, h.a.) evel reizhiadoù arouezioù. Diskouez a ra enta ar semiologiezh bezañ danadeilad skiantoù an den.<sup>2</sup>” Na

<sup>1</sup> Da envel an diskiblezh-mañ e kavan gwell amprestañ an termen gallek, amprest e unan eus an amerikaneg *semiotics*, rak an termen *Arouezoniezh* (a ginnigis e 1986, sl. KIS-345, La-08, p. 335) a virfen evit studi an arouez en he holl amparoù, eleze en he amgant nidiadel, studi nad eo ket ur skiant, met ur skourr eus ar Brederouriezh.

<sup>2</sup> “La sémiologie ou sémiotique (du grec *shmei'on*, « signe ») tend aujourd'hui à se construire comme une science des significations. En tant que telle, et par conséquent, la sémiologie est la méthodologie des sciences qui traitent des systèmes signifiants, donc des « sciences humaines »,

ziwelomp ket daougemeradezh Gl.Sz. *science* hag an temptadur d'ober eus “skiantoù an den” ur ouezoniezh leunwirioù. Dre bennaenn enta gant ar Semiotik ne c'hell bezañ eus an arouezioù nemet ergorennoù ordinal, beziadoù soliadel — ne oufe ober anezho estreget beziadoù soliadel hep freuzañ he diazez hag ar semiotikour a skrive din e 1988 “ne oa ster ebet gant keal an nid” n'en dije gallet diskleriañ netra all (sl. KIS-493, La-10, p. 360). Padal ez a pelloc'h ar Semiotik eget ar Yezhoniezh : houmañ a studi ar yezhoù graet hep enskrivañ o geneliezh en he divoud ; en eneb, e pled ar Semiotik gant orin an arouezioù, ouzh o renkañ e-touez ar c'henderc'hadoù kevredadel-istorel. “Hep kuitaat enta tachenn an arouez hag ar reizhiad, e kement ma chom trayezh, arlakadenn ouiziel, ez eur degaset da embreger ar semiotik evel un dezvarn eus e gerzhed hengounel ha bonel dezhañ e unan, eleze da zigaelañ amgloz an *arouez* hag ar *reizhiad* evit ober meiz war *genderc'herezh* gwerc'hek, danvezel, korfel, kevredadel hag istorel ar pleustroù arouesaat.<sup>1</sup>”

Ar Yezhoniezh evel studi ar yezhoù graet zo ur skiant a'n den e-touez ar re all ; ma n'emañ ket en he beli anaout ar yezh evel beziad nidiadel, ma ne c'hell ket a-du-rall bezañ darbennet evel gouezoniezh, ez eus anezhi koulskoude un diskiblezh kewer ha pa ve dre ma rann gant ar ouezoniezh he damant d'an ergoregezh. Heñvel ne c'haller ket lavarout eus ar Semiotik. Dre zespizañ a-gentouez an ober arz, an ober yezh evel lankadoù eus c'hwel an diemouez<sup>2</sup> ha war un dro eus ar c'henderc'hañ “gwerc'hek, danvezel, h.a.” e tro kein

---

puiqu'elle considère les pratiques socio-historiques qui font l'objet de ces sciences (le mythe, la religion, la littérature, etc.) comme des systèmes de signes. La sémiologie apparaît ainsi comme l'infrastructure des sciences humaines [...]” (Julia KRISTEVA, SEMIOLOGIE, in *Encyclopædia Universalis*, t. 16, p. 703 c.).

<sup>1</sup> “Sans quitter, donc, le terrain du signe et du système, pour autant qu'elle reste une métalangue, une théorie scientifique, la sémiotique est amenée à se pratiquer comme une critique de sa démarche traditionnelle et fondamentale, c'est-à-dire à débloquent l'enclos du *signe* et du *système* pour rendre compte de la *production* effective, matérielle, corporelle, sociale et historique des pratiques signifiantes” (Julia KRISTEVA, *id.*, *ibid.*).

<sup>2</sup> “Adalek dizoloadenn freudek an diemouez evel leurenn kenderc'hus d'ar ster, evel *c'hwel* (« na zezev ha na jed : en un doare ne zezev ket ; a-walc'h gantañ treuzfurmiñ ») eo hepken e c'haller devezout ar ster hag e holl gendaveegoù (an arouez, ar reizhiad, ar gouzrec'h) evel kenderc'hadus, ganadus, o tisoc'h eus un argerzh.” (“C'est seulement à partir de la découverte freudienne de l'inconscient comme scène productrice de sens, comme un *travail* (qui « ne pense ni ne calcule : d'une certaine façon il ne pense pas ; il se contente de transformer »), qu'il est devenu possible de penser le sens et tous ses corrélats (le signe, le système, le sujet) comme productibles, engendrables, résultant d'un procès”, Julia KRISTEVA, *id.*, p. 706 a-b.)



da bennaenn an angouzout evel d'an hontkenderc'hañ ha kouezhañ a ra e renk un ideologiezh<sup>3</sup>.

En hevelep doare ma intent an ideologour forzhañ an devoudoù diwar m'“emañ ar gaou ganto”, e tremen ar semiotikourion ken plaen ha tra eus an deskriñ d'an erskrivañ. Testoù omp d'ar freuz a c'hellont ober war ur yezh toc'hor evel ar brezhoneg. Ar yezhoù o vezañ hervez ar Semiotik frouezh emdarzh ar c'heflusk kevredadel, ne c'halle bezañ a vrezhoneg evitañ nemet an dilerc'hioù teodyezhel o trebadout er c'hornioù al leiañ tizhet gant an deskadurezh c'hallek ha, da c'houde, gant diorreidigezh ar brezhoneg. An erlev a roe oa mirout en he glanded ar *yezh naturel* — war a hañval ez eo er Semiotik en deus gwengel ar *yezh naturel* kavet e repu diwezhañ<sup>1</sup>. Gant gerioù all, ul leviadur yezhel “o kemplegañ da reolennoù ar Semiotik” oa leuskel an argerzhioù soliadet da gas an teodyezhoù da get ha se dre o gwareziñ ouzh emsil ar c'henderc'hadoù nidiadel — ar re-mañ, dre eurvad evit an deodyezherion, a zeue dezho a-fonn... e ser ar galleg.

(GP — 18 10 98)

Chomet on gwall arvarek, da gentañ, en ur lenn ‘Pennaenn an angouzout’ evit ar pennad-mañ da vezañ frammet strizh ; kempoell e arguzennoù en laka da gendrec'hus. Padal e kleven ez oa un dislavar etrezañ hag ar pezh am boa embreget betek bremañ war dachenn ar yezhoniezh. Me gav din e teue dreist-holl diwar ur gwaradur eus talvoud ar gerioù arveret.

---

<sup>3</sup> Ken abred ha 1974 ez ae Roland BARTHES da emzifenniad er “breudad ideologek, eleze politikel, a reer alies ouzh ar semiologiezh, diskuliet evel skiant kilstourmer pe ac'hoel diseblant ouzh an engouestl ideologek : daoust ha ne voe ket tamallet d'ar strukturelouriezh [...] bezañ ur skiant kenwaller d'ar galvezveli, d'ar c'haollouriezh zoken ?” (“[...] le procès idéologique, c'est-à-dire politique, que l'on fait souvent à la sémiologie, dénoncée comme une science réactionnaire ou tout au moins indifférente à l'engagement idéologique : n'a-t-on pas accusé le structuralisme [...] d'être une science complice de la technocratie, voire du gaullisme ?”, en ur brezegenn graet en Italia, embannet gant *Le Monde*, 7 Mezheven 1974, ademb. in Roland BARTHES, *L'Aventure sémiologique*, Seuil, 1985.) Iskisat arguzenn evit kanteizhañ ur skiant, haeriñ ne oa ket “diseblant ouzh an engouestl ideologek”.

<sup>1</sup> Roland BARTHES da skouer en e studienn *Sade, Fourier, Loyola* (Seuil, 1971) a geveneb *la langue naturelle* ha *le texte*, yezh nevez a zo ivez kefridi ar Semiotik he dezrannañ. Menegomp un arver eus ar c'herienn *langage naturel*, hep kennotadur ideologek evelkent, gant ar Stlenneg a-gevenep da *langage artificiel* (sl. GSTL. ¶¶ 2255, 2275).

Evit plaenaat e rin, a-getep *yezhoniezh<sub>GP</sub>* ha *yezhoniezh<sub>GE</sub>* eus an daou vezad a gredan spurmantiñ amañ.

Didermenañ a ran *yezhoniezh<sub>GP</sub>* evel studi gouezoniel an anadennoù ergorel a reer yezhoù anezhe, ar pezh a anver en uhelalamaneg (abaoe prantad ar *Junggrammatiker* da'n nebeutañ) *Sprachwissenschaft*, eleze ivez degemeradoù zo ar *Sz. linguistics* hag ar *Gl. linguistique*, o klotañ gant ar pezh a gaver gant Mounin (*Dict de la ling.* 204-205) :

étude objective, descriptive et explicative de la structure, du fonctionnement [...] et de l'étude de l'évolution dans le temps [...] des langues naturelles humaines.

Diwar c'horre e c'haller pegañ ouzh un hevelep diskiblezh al lezanv a “skiant mab-den” o vezañ ma pled gant “yezhoù naturel mab-den” evit sentiñ ouzh boazioù ar galleg alamodek, ar pezh a zoug nebeut a ster hag stlenn, da'm meno, rak ne welan ket petra vije “skiant an anden”, a pa vije ar jedoniezh. Ne vern, ur skourr eus a anver gouezoniezh eo dre na ra (pe na rankje ober, da'n nebeutañ) nemet gant an hentennoù imbourc'h a reer gouezoniel anezhe evel m'en klever, da skouer, hervez K. Popper, gant anadennoù ergorel hag a saver àr o divoud damkaniezhoù diorzhadus (*Sz. falsifiable* bet treuzplaket fentus a-walc'h e galleg e-pad pell). Mounin (*l.m.*) a grog gant ar gerioù *Science du langage*, o heuliañ Marouzeau (*Lex. term. ling.* 137) :

Science du langage, particulièrement du langage articulé.

Diaes em laka arver *Gl. langage* amañ, roet evit gwir da heñvelster ouzh *langue* (sl. Mounin 197 *langue* ou *langage*' evel ma lavarar el *langue la plus claire du monde*). Abaoe PRED. 79-81 e vezan o tiforc'hañ strizh *yezh* ha *lavar* ha war studi ar yezh(où) hepken ez ardaolan an anv a *yezhoniezh*.

Evit *yezhoniezh<sub>GE</sub>* a bled gant ledergorennoù (eleze meizadoù *peuz-andiorzhadus*, diuzet mat ar ger) a reer *arouezioù* anezhe hag e teu da vezañ, a dra sur, unan eus ‘an diskiblezhioù bodet e klub “skiantoù an den”’ ken m'emaon a-du krenn gant *GE* evit nac'h ouzh un hevelep diskiblezh an adanv a *ouezoniel* (er ster strizh meneget a-zioc'h). Neuze, setu ma goulenn : hag eñ ne ve ket furoc'h ober gant daou dermen disheñvel evit envel *yezhoniezh<sub>GP</sub>* ha *yezhoniezh<sub>GE</sub>* (er ster *nevez* a gaver er

---

<sup>1</sup> A pa welan, dreist-holl, an aozer o tec'hervel d'e sikouriñ (diezhomm, da'm soñj, pe dibabet fall) tudennoù evel Barthes ha Kristeva, kozh riboterion vremen anezhe (kar-nes eo Br. *bramm* ha hIn. *bráhmaṇ*- evel o deveradoù *brammer* ha *brahmán*- !) bet tatinet ken saourus ha sasun gant Sokal, a-unan gant dreistbleuñveg intelektualed Paris, mes un afer all eo.

pennad-mañ) ? N'onn dare hag eñ zo ar gwir ganin, tuet e ven avat da ober \**lavarouriezh* (kent eget *lavaroniezh* [PRED. 79.7], marteze) eus yezhoniezh<sub>GE</sub> o klotañ, a-du'rall, gant arverioù zo bremañ eus an Au. *Linguistik* (diwar hol an amerikaneg o tont e-unan eus ar galleg “arnevez”) enebet ouzh *Spachwissenschaft* (hag ur Br. \**linguistik* a vije arveradus ivez moarvat).

Setu perak ne'm eus netra da enebñ ouzh arver *semiotik* evit envel diskiblezh Kristeva (ha re all siriusoc'h egeti, spi'm eus). Evidon-me a ray gant *steriadoniezh* moarvat da'n deiz ma ouezin petra resis eo ar *steriad* (kevelep gant mouezhiad neuziad [bet badezet sot *yezhad* ganin gwezhall] eread).

A-zivout p. 236 n. 1 e kav din ez eo spletus ober gant *yezhouriezh* hepken evit ar pezh a anvemp *sturyezhouriezh* (pe “*reizhyezhouriezh*” RH da gentañ). Ma tegemerfed ma c'hinnig a-zioc'h ez enebfed ken eeun ha tra *yezhouriezh* \**lavarouriezh*.

(GE – 21 10 98)

Evezhiadennoù GP a'm broud da'm zro da adwelout termenoù 'zo a arveromp o fiziout alies war aotrouniezh aozierion all, hep ren warno an dezvarn diziouerus d'un devezout dizalc'h. Pa ra GP gant “studi gouezoniel”, “anadennoù ergorel”, MOUNIN gant “étude objective”, “langues naturelles humaines”, e reont evel pa vije gant *gouezoniel*, *ergorel*, *objectif*, *naturel* ur ster peurzespizet, rez d'ar meiz, darbennet gant an holl. Digudenn e vez, ha c'hoazh betek ur par, an arver eus termenoù seurt-se etre arbennigourion a'n un diskiblezh met, e verzhout a reomp bemdez, kerkent ma klaskomp teurel ur pont etrezek un diskiblezh all, e rankomp o despizañ, ac'hoel reiñ un alberz eus ar savlec'h a roomp dezho en devezout — kuites da ziskoachañ e se hon savlec'hiadur hon unan e-keñver bed ha bout... pa n'eo ket e-keñver traved ha trabout ! Marteze eo naturel etre yezhoniourion ober anv a “*yezh naturel*”, ar bomm-mañ avat a lakfe e vlev, lakaet e chomfe anezho, da sevel a-bik war benn ur prederour.

Kemeromp an termen Br. *ergorel*, Gl. *objectif* (arloet ouzh an traoù) he deus ar Ouezoniezh amprestet digant ar Brederouriezh. Ur skalfad sterioù, gourzhenebek alies, zo bet dezhañ abaoe ar Skolastik. Mar chomer kantet en tri c'hantved diwezhañ, en en gweler intentet disheñvel hervez redennoù ar preder. Evit BERKELEY ez eo ar werc'helezh un arvez eus an derc'helezh (ar gwerc'hennoù bed, an traoù, zo derc'hennoù eus ar spered) hag an ergorelezh ne c'hell bezañ nemet an disoc'h eus ur c'henglev etre ar speredoù (ur gendangorelezh) ; KANT, ma ne zinac'h ket bezoud an traoù, a ra anezho koulskoude un trehont d'hon c'hantouezañ, un en-un, un noumen :

eus ar gwerc'hennoù ne anavezomp nemet o anadenn, o fenomen, a zo un derc'henn a'r spered ha, war un dro, ar pezh a c'hellomp diraez eus ar werc'helezh e disoc'h un dezvarn gant hon *ervredañ* (*Verstand*) hag ur soliadur war ar *poell* (*Vernunft*) — an ergorelezh zo enta frouezh ur puraat renet e-barzh ar spered war an anaout pourchaset gant ar skiantoù<sup>1</sup>.

Eus damkaniezh KANT he deus ar Ouezoniezh dilezet keal an noumen, ar werc'helezh dreist diraez, ha dalc'het keal ar fenomen, oc'h ober anezhañ an nor o skeiñ war ar werc'helezh — houmañ o vezañ diraezadus enta dre ur c'hantouezañ hentennek. An ergorelezh n'eo mui ur perzh eus an anaout soliet war ar poell, met amkan ur moned etrezek ar werc'helezh ma c'hoari ar poell e roll moarvat, met evel araez ha n'eo mui evel pennaenn a-gentouez. Frouezh ur puraat eo c'hoazh, met ur puraat renet en darempred en deus ar gouezoniour gant an traoù. E se, kentoc'h eget a *bennaenn an ergorelezh* e terefe komz a *hentenn an ergorelaat*, an ergorelezh o skediñ bpred evel un eorizh war dremmwel an imbourc'h.

Neoazh, hag aze emañ pistig ar Ouezoniezh, an *anaout* e unan, pelec'h e renkañ ? Un anadenn e ve e-touez an anadennoù ? Kounaomp ar bomm deuet gant un danvezelour eeunek : an empenn a vorc'h an devez evel an avu ar vestl. E gwir, ar werc'helezh savelet diwar-bouez an ergorelaat a lez un dilerc'h e rezh an ergorelaer, a lavarar c'hoazh ar *gouzrec'h a'n anaout*. Hogen an anaout ergorel o vezañ boutin dre bennaenn etre kement anavezer 'vez, e kemer ar Ouezoniezh an aotre da ezwerc'hañ gouzrec'h an anaout ; muioc'h : e rank e ezwerc'hañ war-benn degas d'he furm burañ ar werc'helezh ergerzhet. Gouzrec'h an anaout zo lod er werc'helezh ha lod diziouerus, retvezek pa'z eo drezañ e sav ar Ouezoniezh. Padal, ar Ouezoniezh en diskas d'ar meni ifern a lakaer warnañ un anv forc'hellek er yezhoù all : *Subjekt, sujet*, un anv dibarek e brezhoneg : *dangorenn*. Damant an anaout gouiziel eo skarzhañ dioutañ e unan nep roud a zangorelezh ha dibardon ar gouezoniour a ve barnet dangorek e briziadur eus ar werc'helezh. E se e vever en daouelezh : diouzh un tu ur werc'helezh ergoreladus, diouzh an tu all an den ergorelaer a ranker kontañ ivez evel gwerc'helezh — hag en aner e klaskfed amañ dedalvout leterc'had an doursiler doursilet : kaer zo d'an den strivañ da emergorelaat ha dont a-benn zoken e keñverioù 'zo, dalc'hmat e chom eñ er-maez eus ar pezh anezhañ en deus ergorelaet. Pa sellan ouzhin e tizoublan en ur seller a-dal d'ur selled hag andireadus e tiskouez bezañ an daouelezh — a c'haller bevañ ganti moarvat : e-doug kantvedoù o deus Kornogiz emc'hraet diouti. Lec'h zo evelkent da emc'houlenn hag abeg a-walc'h eo se evit kenderc'hel ? Eviti da vezañ bet frouezhus

---

<sup>1</sup> Sl. KIS-506, La-10, pp. 433.

e keñverioù pleustrel 'zo — ni oar pe re : diorreadur skiantoù an alvez ha betek ur par skiantoù ar beved, ar c'halvezerezhioù — ez anad kriz ouzh kriz an troc'h ez eo an daouelezh ergorel–dangorel en hon darempred kenetrezomp ha gant ar bed. Mui ouzh mui a brederourion a gav kantreizh klask emzizober anezhi.

Splannañ azon an enkadenn ergorelour eo digloradur “skiantoù an den” a reer c'hoazh anezho e brezhoneg “skiantoù ar vuhez”. Arloañ hentennoù an ergorelaat ouzh gouzrec'h an ergorelaat a zibouk en un daouelezh vac'h, e koubladoù meizadoù hon pella diouzh an den kentoc'h eget hon treiñ outañ : faoutañ a reont ar gouzrec'h etre kreud ha bred, ar gevredigezh etre danadeilad ha dreistadeilad, al lavar etre kanteul hag arganteul, avatarioù holl eus ar c'houblad ergorenn–dangorenn (kaer zo d'an ergorelaat ezkaelañ an dangorenn, e tistro an tasmant a-dreuz d'ar mogerioù). Ken n'eus eus skiantoù an den nemet un asvan a ouezoniezh. Rak evit ar Ouezoniezh, ergorelaat zo jedoniekfaat ha berzh leun a ra e domani an alvez — reishoc'h lavarout : ganti eo bet savelet domani an alvez evel teskad an anadennoù jedoniekadus. Ar Vevoniezh da skouer, pe skiant ar beved, diskiblezh a-c'haoliad war vuhez hag alvez, a c'hoarvez a zeskrivañ arc'hwelioù a-gesout<sup>1</sup> gant argerzhioù fizikel, kimiek, stlennegel — ergorel ha jedoniekadus enta — ha drezo e c'haller lavarout he deus ar Ouezoniezh perzh enni, met n'eo ket hi gouezoniezh en he fezh, rak an arc'hwelioù o unan, ha pa ve dre benn ma reer seiz warno e termennoù a hiniennded hag a zavedelezh<sup>2</sup>, zo anjedoniekadus.

E-touez an danvezioù ma pleustr warno skiantoù an den emañ al lavar. Ur skouer vrientek eo a-fet hon prepoz. Rak, evel an den e unan, emañ al lavar bezant en daou du eus an troc'h ergorelour : evel *lavar lavaret* emañ e tu an ergorenn, evel *lavar lavarout* e chom e tu an dangorenn. A un luniad gant ar Vevoniezh e ve enta un diskiblezh anvet *Lavaroniezh* a zespizfed evel deskrivadur arc'hwelioù a-gesout gant argerzhioù ergorel. Hag en hevelep doare ma'z eus o c'houkorañ ar Vevoniezh un torkad diskiblezhioù gouezoniel, alvezel, jedoniekadus e rezh ar bevskiantoù : Bevgimiezh, Bevfizik, Bevstlenneg, e ve o c'houkorañ al Lavaroniezh ivez diskiblezhioù gouezoniel — en o zouez ar Yezhoniezh hervez an despizadur roet dezhi gant GP : “studi gouezoniel an anadennoù ergorel a reer yezhoù anezhe” pe gant

<sup>1</sup> Kredet 'm eus kentradiñ ur verb *kesoutañ* hag an araogenn *a-gesout gant* evit merkañ ar c'heñver etre un devoud bevedel hag an anadennoù alvezel ez eo ivez (sl. KIS-540, La-11, pp. 216, 231). Notañ e ra Hans JONAS gant *in conjunction with* en hevelep degouezh (id., p. 235).

<sup>2</sup> Sl. “Hiniennded ha treiñded e preder Hans JONAS (Kis-540, La-11, pp. 21o hh.). “An davedelezh” (KIS-544, La-11, pp. 269 hh.)

MOUNIN : “étude objective, descriptive et explicative de la structure, du fonctionnement [...] et de l'évolution dans le temps [...] des langues naturelles humaines”. An adanv *naturel* a gavfe aze ur meni kantreizhadur o verkañ e c'hoarvez divoud an diskiblezh eus arveziou *alvezel, ergorel* al lavar.

Pelloc'h ez afen diouzh daou zurc'hadur. Da gentañ e kav din ez eo ar Yezhoniezh chomet hanter hent : mar he despizer evel “studi gouezoniel anadennoù ergorel”, e rank mont betek penn ha bukañ d'ar jedoniekat<sup>1</sup>. Ha hi savelet adalek al lavar e stern silwink an daouelezh, e ve moarvat emsavus dezhi bezañ desellet ivez evel un astenn eus ar bevskiantoù.

Gant gerioù all, ha ne ve ket un hent frouezhus an hini a strivfe d'ober meiz war luniadoù 'zo eus ar yezhoù diwar-bouez luniadoù 'zo eus arc'hwelerezh an nerveg ? Seurt arlakadenn difennet gant Konrad LORENZ, Noam CHOMSKY ha re all, kantrat ent ouziadoniel, a c'houl evel just bezañ soliet war studi gouezoniel anadennoù ergorel.

D'an eil, mar 'm eus graet anv a-zioc'h a *Lavaroniezh*, n'eo ket pa ambredfen ur “skiant an den” kent pe digent. Sevel un diskiblezh a rafe war-dro al *lavar lavarout* a-dal d'ar Yezhoniezh desellet evel studi ar c'henderc'had anezhañ, al *lavar lavaret*, a ve kensakriñ an daouelezh ur wech ouzhpenn. Re vadelezhus eo GP ouzh ar Semiotik : poan gollet eo klask e saveteiñ dre e adloañ en ul *Lavarouriezh* pe en ur *Steriadoniezh* : an disoc'h eo eus un argeziad da zont er-maez eus an daouelezh ergorelezh-dangorelezh, ya met dre leuskel war an dangorelezh d'he dispeuziñ ur feulster ideologek dindan banniel an ergorelezh, gant gerioù all dre ziren an den d'ur vaezienn a rezh alvezel ma c'hoari gwikefreoù an diemouez ha gwikefreoù kevredadelistorel ken ergorel all. A-du on gant Gérard LEGRAND : “« skiantoù an den », [...] eus skiantoù hep dangorenn (emvennad bonnet alies) zo aet da skiantoù hep ergorenn. An den ned eo mui o skod : ezvezant eo anezho<sup>1</sup> ”. Prizius eo a dra sur ar Yezhoniezh, evel ma'z eo prizius Korfadurezh ha Bevoniezh volekulel, met ne spir ket da embregerion al lavar ez eo den ar pemdez, ar skrivagner, ar yezhour ha se dre an arbenn eeun a'm eus meneget c'hoazh ma 'z eus anezhi ur studi ergorenoù ha ma

<sup>1</sup> Tro hon eus bet c'hoazh, GP ha me, da genskrivañ war an divoud, sl. KIS-533, La-11, pp. 168-178.

<sup>1</sup> “Les « sciences humaines », [...] de sciences sans sujet (ambition souvent proclamée) sont devenues des sciences sans objet. L'homme n'est pas leur enjeu : il en est absent” (*Voc. Bordas de la Phil.*, p. 306 b). An daou gemeradur eus Gl. *sujet* a ro tro d'an aozer da amsteriañ war ar ger ; dibabet 'm eus treiñ hemañ dre *dangorenn* war-benn mirout ar geveneped gant *ergorenn*, daoust ma ra ivez an arroud dave da “*gouzrec'h* an anaout”.

vevomp en ur bed a ergerc'hennoù. An amkan evit ar prederour eo souzañ eus hent bac'h an daouelezh. An un yezh eo an hini a gomzan, a lennan, a skrivan, a labouran da ziorren, a zo bev ennon zoken e-pad ma kouskan hag an hini a studi ar yezhoniour. A-viskoazh on bet war glask d'al

lec'h” ma vo ergrafet ar yezh, al lavar, evel an unanoù ez int ha n'eo mui e rezh beziadoù diempret etre ergorelezh ha dangorelezh. Va fennad “Pennaenn an angouzout” zo un holc'h goude holc'hoù all davit an kez lec'h a unded.